

Dizano - Chañson nevez

Modernnaet eo bet an doare-skriva. Ober ar ar ar skrivagner gand kalz a heriou galleg, berzonekaet tamm-pe-damm. Iskiz kenañ eo zoare-skriva. Ober a ra gand "q" !

Savet eo bet ar skrid-se e fin an XIX^{ved} kantved.

Kompozet war sujed eur himiad etre daou zen yaouank euz a eskopti Treger

War eun ton divertisant.

Ar gwaz

Boñjour deoh, va Mestrez, deut on c'hoaz d'ho kweled ;
Dioh ma leverot din, em rentot glaharet :
C'hwi 'oar a bell-amzer pegement ho karan ;
Merket em-eus deoh n'en-de' ket a-vremañ.

Demeuz eur hostez all hoh-eus sur va zromplet,
Ma na deut¹ hoh-unan eun nebeud d'am hared :
Seblantoud a ree din ne oah ket droug-kontant
M'en em gavem eun tu, asamblez, o parlant.

Bet zo ganeom on-daou aliez preposiou,
Testez vad oh ane, dalhit mad d'ho komzou.
Me 'vo fidel d'am ger, dalhit mad d'hoh hini ;
An amzer a avañs, poent e' deom dimezi.

Ho pizaj, ho poltred, ho teod, ho taoulagad,
Ho furnez, ho tousder, ho komzou deread,
O-deus greet em spered ker braz impresion,
Mar deut d'am dilezel, e ranno va halon.

N'oufen petra d'ober, red eo kleved bremañ
An arret definitif, va setañs diwezañ :
Gwell eo mervel buan eged boud lañgisant,
Bepred en esperañs, bepred en nehamant.

Roit din, va Mestrez, prontamant va arret,
Ha soñjit ken e rei em-eus kalz ho karet ;
Konsultit ho kalon, soñjit n'ez eus hini
Ho kar mui egedon, ha deut d'am hoñsoli.

Ar plah

Doned d'ho koñsoli a houlit, va mignon.

¹ Ma na deut : Me ne deuit ket.

Ezomm am-eus ivez a goñsolasion :
Ganeoh e houlennan ar hras a houlennet²,
Ezomm on-eus on-daou da veza koñsolet.

Ho setañs a houlennit, plijet gand Jezuz
E tepante ouzin he rei deoh grasiuz !
Serten en ho-pije en ho tiskresion,
Agreabl deom on-daou en dezir or halon.

Ma vijen-me mestrez demeuz va bolonte',
Me 'oa deoh ha c'hwi din heb neb difikulte :
Me 'm-eus ho karet mad hag ho kar a-vremañ,
Ranna 'ra va halon oh en em dispartiañ³.

Mez kent dispartia, me ho ped, selaouet⁴,
Ha grit refleksion war va ger eur momed,
Doue a hourhemenn senti oh tad ha mamm,
Hag oboisa de' evid beza divlamm.

Int a zalh 'n or heñver plas an Aotrou Doue,
Oboisom, p'on-eus digante ar vuhe' ;
Kalz a boan o-deus bet o tond d'on elevi,
N'e' ket just heb o gras-vad doned da zimezi.

O ! maouez 'zo evidom serten mouez eun Doue,
Biken netra ne ran hep kaved o hoñje :
Greet em-eus va fosubl evid o renta kontant,
Greet hoh-eus hoh hini, ha ne dint ket asant.

Me 'gred bremañ serten ne dom ket destinet
Da veza priejou assemblez uniset ;
Doue 'ra deom entent e vouez dre o genou,
Biken ne damgresan sur e hourhemennnou.

Ma reen heb o gras-vad eur marhad ker paduz,
Em-bez aon goude-ze na ven-me maleüruz ;
Va houstiañs goude a rebechfe din-me
Em-be ho kemeret hep koñje va ligne'.

Komzet 'm-eus ha greet komz en or faveur oute,
Ha biskoaz 'm-eus gallet o zrei war an tu-ze ;
Kredit en asurañs on-me ket braz fachtet

² ar hras a houlennet ; a houlennit.

³ en em dispartiañ : ne ra ket ar hemmadur D.Z, mez gwechou 'zo e ra.

⁴ selaouet : selaouit.

Ha ma oufeh beza, pa ne dint distroet.

Kement am-eus greet toud a zo bet inutil,
Dimezi heb o hoñje n'en de' ket difisil ;
Mez hennez 'zo eun dra ha na rin birviken,
War gement-se jamez ne dorrin o lezenn.

Ar gwaz

Eh bien, va mestrez, houmañ 'zo kalonad,
A goust eun aboñdañs daelou d'am daoulagad,
Va halon gand glahar a zo kazi rannet :
Houmañ 'zo kalonad, goude beza karet !

Ar plah

Allaz ! va zervicher, penaoz ho koñsoli ?
Ker braz eo va regred ma ma'z eo hoh hini,
Kemend en ho karen ha m'halljeh va hared,
Ar regred a zo just entrezom partajet

Ar gwaz

Koulz eo 'ta, va mestrez, prontamant kimiadi ;
Pe n'eus ket a voyen evid or hoñsoli ;
Kredet am-boa bepred an amzer a deuje
Da zistrei ho kerent da veza em hoste'.

Gouenzet em-boa i ha distroet a-grenn,
Mez prestig goude-ze e cheñchont o lezenn ;
Ne fiziin ket enno, a-walh hoh-eus klevet
Diwar va fenn bemdez pa deuen d'ho kweled.

Poente' deoh kaoud peoh ha din-me dimezi,
A-benn eiz deiz amañ me 'vo sur anezi ;
Kezu am-esu ho kuitaad ; c'hwi 'vije, ma karjah⁵,
Nemed war ho refuz birviken n'am-bo plah.

Adieu deoh a laran, *adieu* va esperañs,
Bremañ me ranko klask en eur plas all va chañs,

⁵ ma karjah : ma karjeh.

Fachet ez on terrubl o toned d'ho kuitaad,
N'en deus netra d'ober 'vid gounid ho kras-vad.

Roit din kent kuitaad eur pok da gimiada,
Allaz ! me 'gred serten e vo an diweza :
Kaled e' deom on-daou eur seurt kriz disparti,
Mankoud 'ra va halon, an nerz em izili.

Red e neb fortun kaoud kalz euz a gourach ;
Arabd eo sukombi biken evel eul lach ;
Finisom gand enor 'vel on-esu komañset,
Pa ne bermet Doue e vem-ni uniset.

Adieu deoh a laran kent eged ho kuitaad,
Me 'houlenn evidoh tri pe pevar mennad :
Da genta kaoud eun all en-devo talañchou
Mui eged m'am-eus-me, ha mui euz a vadou.

Buhez hir, joa, eürusted kalz demeuz a chañs,
Yehed, plijadurez, famill en aboñdañs,
Gras Doue er bed-mañ da zond d'ho kenderhel,
Er bed all ha goude d'ar joaiou eternal.

Ez an bremañ d'ar gêr, *adieu* a lavaran deoh,
Birviken n'ho kwelin, n'am-bezo joa ouzoh,
Mar permet va glahar areti va daelou,
A-benn eiz deiz amañ eur plah all am-bezo.

Pa ne hallan kaoued an hini am-eus c'hoant,
Sur eun all am-bezo hag a vezo kontant ;
Eun nor a zerr ouzin hag eun all a zigor :
Red eo goude refuz repari an enor.

Ar plah

Allaz ! va zervicher, m'ho ped, na gredit ket
E ven-me kirieg mar doh bet refuzet :
M'am-bije-me gallet, hep terri al lezenn,
Doned d'hoh eureuji, serten en her grajen.

Kmeent on glaharet ma oufeh-hu beza ;
Emedi va halon war ar poent da ranna ;
Braz eo ar sakrifis a ran-me da Zoue.
Me 'gred e resevin ar rekoñpañs goude.

Me 'garje n'am-bije birviken ho kwelet,

Pa ne hallan bremañ ho posedi bepred ;
Dre va oboisañs ker a-walh e paeañ
Va edikasion, va antre er bed-mañ.

N'oufet petra raet⁶, al lezenn a gomand,
Ne avañsin jamez heb o hoñsantamant :
Brizom bremañ souden oll nerz or chadennou,
Ha renoñsom a-grenn d'on oll bromesaou.

En em separom pront, pa n'hellom koulskoude,
Na chomom ket an eil d'afilja egiel ;
E leh all ni 'gavo eru re d'or hoñsoli,
Rag amañ or glahar na ra nemed kreski.

Kent ma tispartim, m'ho ped, va zervicher,
Eun daou pe dri souhet am-eus c'hoant da ober :
Eur fortun gaer ha pront, furnez, madou, koantiz,
Vertuz, spered, menaj, famill ha yaouankiz.
Gras Doue er bed-mañ da zond d'ho kenderhel,
Hag er bed all goude ar joaiou eternal :
Setu aze ar pokou ho-poa-hu goulennet,
Biskoaz hini na rois gand muioh a regred.

Ma kare an dud yaouank pere a ren er bed,
Kondui o yaouankiz gand enor ha respet,
E vefent oll ervad e-durant o buhe',
O kaoud an esperañs demeuz a hloar Doue.

⁶ N'oufet petra raet : n'ouzoh ket petra a rit.